

# TIR NA N-OG

≡ KELAOUENN DAOUVIZIEK ≡

KOUMANANT BLOAZ : 250 lur



Renerion : Per Denez, R. Huon

Kas an arc'hant da : R. HUON, Roud ar Roc'h  
C. C. 68408 Rennes LANNION

D' hon huñvreou paer  
A zo trech d' ar bed.

# Tir na n-og

- Douar an Yaouanvez -

NIV. 4

MEURZH-MEZHEVEN 1947

**TIR NA N-OG**

Niv. 4 — Rummad nevez  
TREDE BLOAVEZH

## TAOLENN

Gweledigezh, <i>Gav. B. Kerverziou</i> .....	4
Tristan hag Izold, <i>Langleiz</i> .....	6
Kanoù en Noz Z. Langleiz, <i>Maodez Glanndour</i> ....	13
Dibennoù da stummañ anvioù-lec'hioù diwar anvioù-gwez, <i>Neven Aberispou</i> .....	18
Anv miz « Gwengolo », M. K. ....	21
Ar vosenn (gwerz pobl) .....	26
Notennoù ha keleier .....	28

(Pep gwir miret strizh)

## Notenn a bouez

E niverenn 2 hor rummad nevez e skrivemp : « Ma vez kaset arc'hant a-walc'h d'ar c'hef *Diner ar Brezhoneg* e c'hello ar gelaouenn dont er-maez bep daou viz ». Un nebeut profourien a zo bet : o zrugarekaat a reomp a-greiz kalon. Kalz re nebeut, avat. Digant an dud all hor bije karet kaout, da vihanañ, o c'houmanant d'ar c'houlz. Ret eo bet dimp gortoz o youl-vat a-raok moulañ. Hag evel-se e vo ret dimp ober bep gwech.

Gant an niverenn 3 eo deut d'e zibenn koumanant lennerien KENED. Evit ar re a zo koumanantet d'an div gelaouenn e teuo gant an niverenn a zeu.

Ra vo paeet ar c'houmanantoù d'ar c'houlz, hag e tegouezho TIR NA N-OG gant ar goumananterien d'ar c'houlz ivez.

Ra vo klasket c'hoazh koumananterien nevez. Setu ar c'halvadenn hon eus graet endeo hag a raimp bep taol.

R. HUON,

P. DENEZ.

## GWELEDIGEZH

Pignet hon eus war an uhelva. Sioul-noz, emañ ar gêriadenn en he fuch er saonenn. Kropet eo gant ar mistral a yud. Ment hec'h ankeniouiçoù a gren betek ennomp dre zaskleur he c'hleuzeurioù-kêr. Bez e lak an avel, avat, ur stignad aer glan etrezi ha ni. Netra ne vir ken, enta, ouzh hor meizerezh da rakverzout Doueed an Tremened ha doueelezh an Dazont.

Beuzet int, an Doueed wechall, edan al lec'hid a stankas mor kêr Foz Varian. A-boan, o splujañ a-dreuz istor, ma tizroer tamm pe damm eus al listri sakr d'an heoliad. A-boan, en ur sevel tiez plijadur, ma tegouezher gant teñzorioù ar poderezh fenikiat.

E nijent, bigi eürus yaouankizoù an Hañv-Nevez. E nijent, koumm ha koumm, tonn ha tonn, gwag ha gwag. Etrezek tir peuzdianav ar C'huzheol. Nemet pa save Aristarkhé ouzh penn-staon ar vag-vlein, e save lusk ar c'halonoù ivez.

« Had hael, Had glan, Had gwen hon Douar, ni a loc'h d'an deizioù dispis... Klod hor gouennad a vo, a-hed chadenn ar c'hantvederioù, bezañ kredet ennomp anvekañ hag arvarusañ kefridi a ve bet fiziet e mabden : dastum ene-veur ar Geoded, hil e daolad dije-dus, ha boule'hañ hent... »

Bro zegemerus dalc'hmat, eus ar c'hrec'h ma souezhas al Ligured o spurmantañ diwarni bigi an Deuidi,

da serriñ a ran em gwelout, evel ma virer ur frouezhenn ragazo marzhus, evel e toug an den war e galon skeudenn divlaz e vuiañ-karet hep dezhañ gouzout mat perak.

Rak marzh a zeufe, frouezhenn a zarevfe, skeudenn a barfe, — marzh, frouezhenn ha skeudenn a genstag an estren gant boulder an neñvoù a-us dit, Vro ! — setu hi emañ em c'hichen, merc'hig laouen ur vamm varv...

Dornig va bugel, pa vin kozh, ha dall, ha kabac'h, pa vo aet diganin pep fiziñs, nemet e buhez an Advuhez, ken tost, pa vezo peurwennet va fennad blev, dianat din a zeiz da zeiz e kollen nerzh ha goanag, hag e rummen muioc'h-mui er reoù a vez rekis kempenn an hent dirak o zreid, dornig va bugel, am eus me kentañ-brav poket dit, blegn neuze ar c'hozhiad, o vont da vezañ harluet eus e ved kaer evel gwechall eus e vro, ETRÉZEK AL LEC'H SANTEL MAN.

Kêr-Varta, 1934

Gw. B. Kerverzioù.

# TRISTAN hag IZOLD

(Pennad)

## II

### MORC'HOLD IWERZHON

Glac'haret holl e oa Kernev-Veur pa zistroas Tristan enni : Gornon, roue Iwerzhon, a c'hourdrouze gwas-tañ ar vro ma kendalc'he ar roue Mark, evel ma rae pemzek vloaz a oa, da nac'h paeñ an tell bet lakaet gant Iwerzhoniz war e c'hourdadoù.

Ha mat deoc'h gouzout petore tell e oa an tell-se : hervez ur feur kozh etre an div vroad e c'helle tud Iwerzhon sevel e Kernev-Veur tri c'hant livrad kouevr ar bloaz kentañ, tri c'hant livrad arc'hant an eil bloaz, tri c'hant livrad aour an trivet; ha pa zeue endro ar pevare bloaz, e teue roue Iwerzhon e-unan da gerc'hat tri c'hant paotr yaouank ha tri c'hant plac'h a bemzek vloaz, dibabet dre zegouezh e-mesk holl diegezhioù ar vro evit bout mevelion ha mitizhion en e lez.

D'ar bloaz-se avat an hini a oa bet dibabet gant ar roue da c'houlenn adarre an tell a oa e vreureg e unan, ur breur d'e wreg ma raed anezhañ ar Morc'hold : ur pikol marc'heg n'en doa gellet den betek neuze, trec'hiñ warnañ dre emgann.

Pa ouezas ar roue Mark an doare, e c'hourc'hemen-

nas da holl varoned e rouantelezh dont d'e lez d'e aliañ. D'an deiz merket, bodet an holl e sall vras, bolzek, ar palez ha Mark en e goazez war e gador uhel, e komzas ar Morc'hold evel mañ : « Roue Mark, sel-laou evit ar wech diwezhañ, kemenn roue Iwerzhon va aotrou : mall eo dit, ha mall bras zoken, paeñ an tell. Ha dre m'ac'h eus nac'het hen ober re bell amzer e kasin fenez gant va lestr, ouzhpenn ar priz dleet, tri c'hant paotr yaouank ha tri c'hant plac'h a bemzek vloaz dibabet dre zegouezh e-mesk holl diegezhioù Kernev-Veur evit bout mevelion ha mitizhion.

« Mar fell da unan bennak eus da varc'heion, koulskoude, prouiñ eo bet savet an tell-se a-enep d'ar gwir, en em ganin gantañ dizouj. Ha bremañ, Aotrounez a Vro-Gernev, pehini ac'hanoc'h a savo da zifenn gwirioù ar vro-mañ ? »

Holl avat e tavent, o fenn stouet ganto, en ur deurel a gorn o skoaz, ur sell an eil ouzh egile; meur a hini anezho o soñjal ennañ e unan : « Sell, paour kaezh sioc'han ma'z out ouzh ment ha neuz Morc'hold Iwerzhon... Krenvoc'h ha kadarnoc'h e ve eget pemp brezelour kreñv ha kadarn. Sell ouzh e gleze daoust ha n'ouzout ket dre be seurt ardoù-hud e laka da nijal pennoù ar c'houroned hardisañ a-c'houde n'ouspet bloaz m'emañ o labourat e dorn e vestr evit roue Iwerzhon ? Sioc'han ma 'z out, daoust hag e fell dit en em gannañ gant an Ankou ? Da betra e talvezfe da varv d'ar re all ? »

Meur a hini all a brederie c'hoazh : « Daoust hag ho tesavet em eus, va mibion ha va merc'hed karet, evit bezañ mevelion ha gisti ? Marv ho tad, evelkent, ne c'hellfe ket ho saveteiñ... »

Lavarout a reas adarre ar Morc'hold :  
« Pehini ac'hanoc'h, Aotrounez a Gernev-Veur, a  
fell dezhañ en emgannañ ganin un emgann dispar a  
ginnigfen dezhañ evelkent : a-benn tri deiz ac'hann



IZOLD

e c'hellfemp, ho marc'heg ha me, tizhout enez Sant  
Samson en donvor e-tal Tintagell, pep hini ac'hanomp  
e-unan en e vag; deomp d'en emgannañ eno ni hon  
daou hepken. Ha pa zeufe d'ho kannad bout trec'het  
ne vefe bihanoc'h a-se ar brud a chomfe a rummad da  
rummad staget ouzh e anv evit bezañ klasket ur seurt  
emgann ! »

Bepred e tavent koulskoude. Heñvel e oa ar Mor-  
c'hold etal dezho ouzh ur sparfell lakaet a-greiz-holl  
en ur gavedell leun a evnedigou : kerkent ha deut tre  
ar sparfell e tavont.

Evit an deirvet gwech e komzas eta ar Morc'hold.

— Rakse ! Aotrounez kaer a Gernev-Veur, peogwir  
e kavit enorusoc'h tennañ ho pugale d'ar blouzen-  
verr hag o gwerzhañ din en eskemm d'ho puhez, grit  
buan, ma c'hellin o c'has diouzhtu da Iwerzhon. Ne  
greden ket evelkent ne vefe ac'hanoc'h, er vro-mañ,  
nemet sklavourion ! »

D'an ampoent e savas Tristan, hag eñ rag-eeun da-  
vet ar Roue, ha da blegañ e c'hlin : « Aotrou Roue,  
mar plij ganeoc'h reiñ hoc'h aotre, en emgannin laou-  
en ».

Aner e voe d'ar roue Mark klask e zibennadiñ : da  
betra e talvezfe dezhañ e hardishted, marc'heg yaou-  
ank ma oa ? Stlepel a reas Tristan e vaneg d'ar Mor-  
c'hold, a zegemeras an arouez gant jourdoul.

D'an deiz dibabet, e voe gwisket Tristan. En e sav  
e-kreiz ar sal-veur, e dreid war ur pallenn seiz-limes-  
tra, en em zalc'he ar marc'heg yaouank tra ma asten-  
ned dezhañ e zokarn dir, lufurus, hag e roched-stamm-  
orjal. Leñvañ a rae dezhañ ar varoned, dre druez evi-  
tañ hag ivez dre vezh eus o laoskentezh. « A Dristan !

a soñjent enno o-unan, baron ter ha brokus, yaouankiz lirzhin, din-me e oa da vont d'an emgann ! Nebeutoc'h a c'hlac'har en dije graet d'an holl va marv eget da hini ! »

Seniñ a rae ar c'hleier, ha war e roudoù e kerzhe, evit e ziambroug betek an aod, holl dud vunut ar varoniezh. Glac'haret holl e oant ha neozh un drugar e oa o c'hlevout o pediñ evitañ, rak ne c'hellent ket paouez a virout fiziañs c'hoazh.

Diwar ken nebeut-all a dra en em vag ar goanag e kalon mab-den ! E-unan-penn e krapas Tristan en e vag ha, kerkent hag enni, e luskas trema Enez Sant Samson. Ur ouel ruz en doa staget ar Morc'hold ouzh e wern; douarañ a reas ar c'hentañ. Edo dres o stagañ e veg ouzh an aod pa zegouezhas Tristan : skañv ha mibin e tilestras hag, a-vec'h war ar jibl, e vountas e vag gant e droad d'he luskañ endro trema an donvor.

— « Petra a rez, mevel ! eme ar Morc'hold. Perak n'ec'h eus ket staget da vag ouzh an aod, eveldon ? »

— Ha perak em befe he staget, mevel, a eilgerias Tristan, pa ouzon ervat, kenkouls ha te, e chomo unan ac'hanomp hon daou war an dachenn : ur vag a spiro d'an trec'hour, nebaon, da zistreiñ d'an douar ».

Komzoù rust ha flemmus ganto d'en em hegañ ha d'en em isañ an eil d'egile d'an emgann, e sankjont betek kalon teñval an enezenn.

Ne welas den ar c'hrogad kriz; dre deir gwech koulskoude e voe douget gant an avel-vor betek porzh Tintagell ur youc'hadenn a gounnar hag a fuc'h. Neuze holl war un dro e stlake ar plac'hed o daouarn da souppediñ an neñv, tra ma c'hoarzhe mevelion ar Mor-

c'hold e-tal o zelloù.

War-droioù ar goubanvel-noz e voe gwelet ar ouel ruz o sevel : bag an Iwerzhoniad a luske trema porzh Tintagell.

Ur c'hlemmvan a darzhas war an aod : « Ar Morc'hold ! Ar Morc'hold ! » A-gentizh ma tostae ar vag, evelkent, e strimpe uheloc'h-uhelañ war gribell ar gwagennoù. A-daol-trumm e tifoupas a-grenn, ha neuze e c'hellas an holl spurmañtifi war e staon ur marc'heg yaouank en e sav, e zivrec'h savet gantañ d'al lein, o wintañ pep a gleze noazh.

Tristan an hini e oa !..

Ha kerkent hag anavezet ar marc'heg setu ma nijas davetañ ugent bag, ha m'en em stlapas dour an holl wazed yaouank a oa da vont d'e ziarbenn.

Lammat a reas Tristan war ar jibl, ha, tra ma poke ar mammoù d'e dreid arc'hennet-houarn e huchas da goskor ar Morc'hold :

— Aotrounez Iwerzhon, en emgannañ kadarn en deus graet ar Morc'hold, Sellit ! Boule'het eo bet va c'hleze : nemet e voe evit e wallenn e voule'has ho mestr : en e glopenn emañ an tamm... Kasit ar boule'h-se ganeoc'h mar kirit, Aotrounez : tell Kernev-Veur an hini eo ! »

Pignat a reas neuze trema Tintagell, ambrouget gant ar vugale en doa dieubet, hag a youc'he dezhañ, brankoù glas ganto en o daouarn. Tenerisoù seiz prizius livet-kaer a oa bet stignet a-bep tu d'ar straed ma 'z ae ganti, ha ken spontus e oa an trouz a rae ar c'hleier, ar c'hanoù a veuleudigezh hag a levez, an trompilhoù hag an taboulinoù ma n'en defe gellet unan klevout ar gurun o strakal.

Hogen tizhet gantañ dor ar c'hastell, ne c'hellas ket Tristan mont ur c'hammed ouzhpenn hag, etre di-vrec'h ar Roue Mark, e kouezhas : a voulladoù e tive-re ar gwad diouzh e gorf gouliet.

Kañv ganto leizh ho c'halonoù, e tistroas marc'heion ar Morc'hold da Iwerzhon. Gwechall, pa zilestre e Weisefort, e vourre ar Morc'hold o spurmañtiñ a-ziabell engroez niverus e wazed deut d'ar porzh da youc'hal dezhañ, hag ivez ar Rouanez, e c'hoar, hag Izold ar Veleganez he blev aour, e nizez, ma skede bremañ he c'hened evel an heol e yaouankiz an deiz.

Laouen ha tener e veze o degemer, cher a raent dezhañ, ha pa dape ur gouli bennak, e raent war he zro hag he gwellaent, rak anavout a raent balzamoù ha drammoù da aesaat d'ar re c'hloaziet deut da vezañ heñvel ouzh tud varv.

Aner e oa dezho avat, evit ar wech, o sekredoù-hud hag ar geotenoù kutuilhet d'an eur vat, hag o die-doù-a-vuhez ! Marv e oa ! Gwriet er c'hroc'hen karv a dalveze dezhañ da liñsel, edo dirazo reut ha yen, an tamm eus ar c'hleze sanket c'hoazh en e glopenn.

Gant Izold an hini e voe lamet ar sklisenn-dir ha laket en ur skrin olifant, priziüs evel ur releger. Ha, stouet war ar pikol kelan, e kane diastal ar vamm hag ar verc'h, unan o tiskanañ d'eben, meuleudi ar gouron lazhet, ha war un dro ganto e leñve dezhañ maouezed ar begin.

E-pad an nozvezh-se eo e teskas Izold ar Veleganez kasaat anv Tristan a Lohonoa.

LANGLEIZ.

## Kanou en Noz Zavier Langleiz

gant Maodez GLANNDOUR

Diaes eo d'ar re a zo deuet nevez 'zo war hol lennegezh kompren an dudi a voe evidomp lennadenn gantañ « *Kanou en Noz* » Zavier Langleiz. Pa zistroañ dre gown war ar c'houlz-se, goude pemzek vloaz tremenet, e santan c'hoazh an esmae am gonezas ken evit an tresadurioù, ken evit an destenn. Ne verzis ket diouzhtu dre ar munut, peseurt breoù am achante : peurliesañ, gant an taol kentañ, e chom diredis d'ar spered ar perak hag ar penaos eus e blijadur; awalc'h eo neuze dezhañ en em lezel da zasseniñ ha klevout gant souezh, kaerder ar son.

Gant an taol kentañ koulskoude, e oa sklaer din kement-mañ : gouzout a rae Langleiz lakaat dindan skeudennoù ar soñjoù skoempañ, dizoleiñ d'hon daoulagad broioù dianavetañ hon ene. Mar en doa ledet war e levr ul liv damdristidik, — pezh a gavis divourrus, — ne vire ket se ouzh e daolennoù da vezañ galoudus ha leun a don. Diaes e oa moarvat d'an oberour, hag eñ Gwenedour ivez, en em zistagañ diouzh levezon Kalloc'h, bepred en he c'hreñvañ. Hogen pa daolan bremañ ur sell endro war « *Kanou en noz* », e welan mat nen eo kement-se nemet un taol-liv war c'horre, a lez gant al linennoù donañ o splannder buhezek.



Hag ar pep anatañ a oa din kement-mañ : ur gourweler eo an oberour. Skeudenniñ hervez gweled an daoulagad, nann, n'eo ket se; met dizoleiñ bedoù diwelus, taolennañ bev trivlidoù kuzhetañ hon ene: setu hor striv a ouenn.

*Teuz va huñvreenn a gemer ur stumm,  
Setu e gorf skañv, gwisket a gened,  
E gein moan ha gwevn, e zaouarn kroaziet,  
Ha setu e zremm ha goulou e dal,  
Hag e ziwvez c'hlan, e zaoulagad gwerc'h...*

« *An den hag an delwenn* », an ene hag ar skeudenn, n'hellomp ket kaout sklaeroc'h diskleriadur eus an atiz a vroud ene ar barzh.

Marteze eo « *Dispac'h al loened* » am hoalas ar muiañ d'ar c'houlz-se, moarvat dre ma oa war un dro unan eus gwellañ kenstrolladoù-gerioù eus al levrig, met ivez dre ma oa ennañ lusk, ha taeroni, ha konnar o tarzhañ. « *Dremm va huñvra maro* », an dremm-se dibellaus evel un tasmant, a blije din ivez. Pe gentoc'h, « *An den hag an dud* », taolenn mibion Adam o vont a engroez, evel ul lanv, pleget o fenn gant pouezh o zonkadur, an dud-se ne c'hell ar barzh o c'hompren na gant daoulagad e gig, na gant e sperd kriz, na gant e galon wall, met hepken gant e ene.

An ene, a-us d'ar c'horf, a-us d'ar meiz krin, setu ur rollad a-bezh a venozioù...

Ha setu dianzavadur ar boellegezh c'hall, met n'eo ket evit mont gant ur romantelezh na vije ken nemet santerezh goullô. Amañ eo an ene a bezh gant e vhez don a venn 'n em zisplegañ, ha displegañ kudenn ar bed.

*Klasket em eus gant va ene  
Klasket em eus gant va c'halon...  
Pebezh huñvre ! Pebezh gwirvoud !  
Poanioù, arvaroù ha goapoù,  
Ganeoc'h va c'halon a c'houzañv  
Kignet ha rannet ganeoc'h.  
Marzh ! O marzh ! A c'hlac'har lirzhin !  
Diframmet diouzh va bruched  
Em c'halon rannet 'm eus kavet  
An alc'houez ken ha ken klasket  
Alc'houez diwelus ar C'hevrin  
A serr dor strizh al Liorzh diwent  
Liorzh ar Gened.*

Buhez, kevrin, kened, tri menoz hag en em stag, en em genstumm, en em sklaera, evel tri ger o tiskleriañ un hevelep gwirionez. Setu mister ar bed dizoloet, mister dianavezet, evel an ene kelt e-unan, evel ar feunteunig-se e kreiz al lann trist ha digenvez.

*E-kreiz ul lann ec'hon, didud,  
Me anav ur feunteunig wenn,  
Ur feunteunig a garantez  
E kreiz ul lanneg a dristidigezh...  
Enni dour sklaer, dour fresk emmi,  
Enni dudi.*

Dilezomp ar gorre; e kalon ar bed, en andon dianav emañ an dour a vuhez. Gortoz, o Barzh ! setu al lava-roù-alc'houez hag a zigor war gevrin ar gwirvoud : Gant an ene en em sellout, Gant an ene sellout ar bed.

*Gant va ene, va madelezh,  
Ha daoulagad va yaouankiz,  
Am eus gwelet ur bed nevez,*

*A gened hag a garantez;  
Gwellet em eus ur skinenn heol  
E kreiz an noz.*

Hogen ne gaver ket ar frealz hep strivañ. Ne c'honezer ket an trec'h hep stourm. Ne gaver ket ar gened hep enklask. Mister ar bed, mister an ene ! Pezh a welomp da gentañ eo an arvar, tu teñval ar bed, an noz, ar boan, ar marv.

*Muntret eo bet  
Ar goulmig laouen  
E kreiz liorz'h Doue.*

Perak ar chivousted-se gant an den ? Perak kement a garseennoù aner, a huñvreoù diskaret ? A benn ar fin, peseurt ster a zo gant ar vuhez ? Ar striv. Kerzh, o den, kerzh, ha pa vefes skuizh, sav bepred uheloc'h. Ar striv-se end-eeun, an hini 'zo kened. Rak ar gened a zo trec'h, trec'h ar vuhez a stourm a-enep ar marv, a-enep an noz, hag a c'honez a benn ar fin. War gri-benn ar menez, goude pignat er boan, ha pa hañvalo dit bezañ kollet pep tra, e splanno evidout tarzh an deiz...

*A C'hlac'har lirzhin !...  
Em c'halon rannet 'm eus kavet  
An alc'houez ken ha ken klasket,  
Alc'houez diwelus ar C'hevren  
A serr dor strizh al liorz'h divent,  
Liorzh ar Gened.*

Gwerzioù bamus ! A benn ar fin e oamp aet ermaez eus roudoù skosellek ur vrizh-romantelezh. Dilezet e oa poullou boutin ur varzhoniezh diwar c'horre, lec'h

ma troe ken aes an dour da hañvoez leun a loenedigoù. Amañ e oa bevder fresk dour-feunteun Barenton, un dour a c'helled evañ. Anv ebet eus un c'hinkladur marc'had mat a goefoù-dantelezh, a vrug alaouret met displegadur buhez wirion un ene kelt : ar-vesterezh, kevrin, tonkadur...

Un dra bennak eus ar perzhioù-se a oa e Kalloc'h, met dame'holoet gant gwagennoù diwezhañ al lanv romantel. Er wech-mañ, e oa digoret dor kuzh ul liorz'h divent : hini ur varzhoniezh vrezhon wirion.

Chom a raio da « *Ganou en noz* » ar c'hlod da vezañ bet arvestadenn gentañ ur bed nevez.

## Dibennou da stuman anviou-lec'hiou diwar anvioù-gwez

gant NEVEN ABERISPOU

Kalz anvioù-lec'hiou a zo stummet diwar anvioù-gwez. An anvioù-gwez a zo anvioù ar gwez a gaver ar stankañ e Breizh (avalenned, kelvezenned, kistinenned, fav, haleg, perenned ha tann), hag ivez anvioù damwez pe brousgwez paot-kenañ (beuz, drein, drez, skav, spern).

I. — Evit envel ul lec'h dindan gwez pe wez e vez staget alies an dibenn *-eg* ouzh strollder, pe liester, pe unanderenn un anv-gwez.

Da skouer : *Avaleg* pe *Avalenneg*; *Kelvezeg*; *Kirizeg* pe *Kerezeg*; *Kistineg* pe *Kesteneg*; *Faveg* pe *Favenneg*; *Haleg*; *Perenneg*; *Draeneg* pe *Dreineg*; *Drezeg*; *Skaveg*; *Sperneg*.

An dibenn *-eg* - se a zo anavezet-mat. Un dibenn gwregel eo, ha da liester boutin en deus *-egoù*, da liesterioù hollek *-egi* hag *-eier*.

II. — Un dibenn latinek kozh a ya ivez da stummañ anvioù-lec'hiou : *-ëtum*. An *-ëtum* - se a zo deuet e brezhoneg da *-oued*, berraet alies en *-od*, ha tanavaet gant un *i* en *-id*.

An dibennoù-se a vez kavet peurliesañ en anvioù-lec'h o tont rag-eeun diouzh al latineg.

Da skouer : *Cerasëtum* a ro *Kirizoued* ha *Kerizid* (*Cerisaie* e galleg); *Castanëtum* a ro *Kistinid* (*Châte-naie* e galleg); *Fagëtum* a ro *Faoued* ha *Faouid* (*Faye* e galleg); *Salicëtum* a ro *Halegoued* ha *Halegod* (*Saulaie* pe *Saussaie* e galleg); *Pirëtum* a ro *Peroued* ha *Pirid*.

Diwar heñvelidigezh eo bet staget an dibennoù *-oued*, *-od*, hag *-id* ouzh anvioù-gwez a orin nann-latinek.

Da skouer : *Avalod*; *Kelvezid* ha *Kilvid*; *Skavoued* ha *Skivid*; *Tannod*; *Beuzid*; *Drezid*; *Spernoued*.

Eus al latin *Pomarëtum* eo deuet an anvioù-lec'hiou brezhonek *Pañvrid*, *Peuvid*, h. a. Talvezout a reont dres kement hag *Avaleg* pe *Avalod*.

Eus al latin *Olivarëtum* eo deuet ivez ar brezhoneg *Olivrid*, da lavarout eo ul liorz gwez-olivez, un olivezeg. (*Olivarëtum* a ro *Oliveraie* e galleg).

NOTENN 1.— Aliesik e kaver an anvioù-lec'hiou-se dindan anvioù-gwez, el liester.

Da skouer : *Kilvidoù*, *Faouedoù*.

Kavout a reer ivez stummoù-bihannaat evel : *Favegig*, *Faouedig*.

Gwregel eo an dibenn *-id*. An dibennoù *-od* ha *-oued* a hañval ivez bezañ gwregel.

NOTENN 2. — Ouzh an anvioù-se e klot alies anvioù gallek kevatal. Talvoudus eo o gouzout evit ad-vrezhonekaat anvioù-lec'hiou pe tud bet gallekaet. Ouzhpenn ar re meneget uheloc'h, setu re all : *Pañvrid* o klotañ ouzh *Pommeraie*; *Beuzid* o klotañ ouzh *Bouexière*, *Buissaie*, *Buissière*; *Kilvid*, h. a. o klotañ

ouzh *Coudraie*; *Kistinid*, *Châtaigneraie*; *Drezid*, *Ronceraie*, *Roncière*; *Faouedig*, *Fayette*; *Tannod*, *Chênaie*.

NOTENN 3.— Mat eo ivez anavezout an anvioù-lec'hioù *Kozpereg*, *Kozperoued*, *Kozpirid*. Ar c'hozper a zo frouezh gouez anvet c'hoazh hili, hiliber. Dont a ra ar ger kozper eus kaltpir, da lavarout eo kaotper: e-kichen kozper e kaver stummoù rannyezhek kotper, kalper. Evit *Kospirid*, h. a. e lavarer *Cormeraie* e galleg peurliesañ.

NOTENN 4. — Graet eo ar studiadennig-mañ diwar Spise'heriadur Emil Ernod. Dioutañ eo tennet an holl c'herioù, nemet *Beuzid* ha *Tannod*. An hini kentañ a zo anavezet-mat; an eil a gaver en anv-lec'h kervennek *Kerdannod*, ur gêr war ar maez e-kichen Montroulez, stok ouzh linenn houarn Montroulez-Karaez war-hed un hanter-lev e Suz an hent da Blougonven.

## ANV « MIZ GWENGOLO »

En eil niverenn eus *Celta* (Gouere-Here 1946) e lenner dindan bluenn an Ao. Falc'hun ur studiadennig diwar-benn anv ar miz anvet e Breizh-Izel a-bezh « miz Gwengolo ». Ur wech ouzhpenn ez eus bet klasaket orin ar ger kevrinus-se.

Hervez an Ao. Falc'hun e voe krouet ar ger-se gant ar Vrezhoned pa ziskennjont etro ar V<sup>e</sup> - VI<sup>e</sup> kantved e Bro-Arvor. Betek neuze o doa graet gant ar ger « Medi » met ur wech douaret en aodoù an Arvor ne spire mui ar ger-se, rak war an douar bras e veze ar « medi » ur miz kreñv kentoc'h eget en enezenn Breizh-Veur. Ret e oa aozañ ur ger nevez... Arabat soñjal, eme an Ao. Falc'hun e c'helle ar ger « gwengolo » bezañ unan eus gerioù ur rannyezh bennak komzet e Breizh-Veur, arack an divroadeg rak n'eus testeni ebet a-du gant-se.

Iskis a-walc'h eo avat an diskleriadema diwezhañ mañ rak meur a dra end-eeun a ro da grediñ e oa ar ger *gwengolo* anavezet hag implijet gant Kelted Breizh-Veur da verkañ an navet miz eus ar bloaz.

E kerneveg e kaver atav ar stumm-mañ : *gwyngala* hag a dleer da zistagañ hervez Caradar (1) : « *gwin-gala* », en ur bouezañ war ar silabenn gentañ... Daoust

(1) Cornish simplified p. 10.

d'ar c'hemm a zo etre o hag a piv na wel ket ez eus kerentiezh etre ar ger brezhonek hag ar ger kernevek ? Hervez Emil Ernod e teu « *gwengolo* » eus ar c'heltiek *vindocalamos* (2) — plouz gwen. Hervez reolennoù ar yezhoniezh e tlefed da gaout e brezhoneg *gwengalañv* met n'ouzer ket perak eo bet deut an a da dreñ en o.

E kembraeg bremañ gwir eo ne reer mui nemet gant an doare-lavar « *mis Medi* ». Hogen en amzer gozh ma kreder da c'heriadur Cynddelw p. 6 e kaved kalz a c'herioù arall :

Mis Medi : Mis yr aeron, Cangaleifion, Cangalaf Lezomp a-gostez *mis yr aeron* (miz an irin) ha studiomp an daou anv all. Raktal e anavezer an div wri zienn anezho : *Can* ha *Calaf* (caleifion n'eo nemet liester Calaf). *Can* = *kann, sklaer*, GWEN. *Calaf* a zeu eus ar c'heltieg *calamos* meneget ganeomp dija. Hañval-mik eo ar ger-se ouzh al latin *calamus* = plouz, korzenn (ac'hano e teu ar galleg chaume : soul). Neuze *Can-galaf* = *Kolo gwenn, plouz gwenn*, GWENGOLO.

Hogen traoù souezhusoc'h a gaver c'hoazh ma selter ouzh miz Eost hag ar gerioù heñvelster roet e gerriadur Cynddelw. *Mis Aust* = *Mis y Gwenith* (Miz ar gwinizh), *Mis yr yd* (Miz an ed) ha neuze ur regennad gerioù o kregiñ gant an anv-gwan *gwin* pe *can* : *gwynogawr*, *Canogawr*, *gwyngoleilion*, *gwynfai*, *gwyhefin*, CANGALAF, GWYNGALAF.

Ar roll-se a ziskouez e talvez a-wechou ar ger CANGALAF evit miz Eost ha miz Gwengolo. Met forzh penaos e kavomp ivez ar ger GWYNGALAF o klotañ a-

(2) Glossaire moyen-breton p. 299.

grenn gant ar GWYNGALA kernevek.

Disheñvel ez eo distagadur ar *gwyn* kembraek diouzh ar *gwyn* kernevek, met kement-se n'en deus ket a dalvoudegezh evit hor studiadenn-ni nag ivez an f a zo oc'h echuiñ ar ger kentañ ; re hir e vefe displegañ se dre ar munut amañ.

Ar pezh a zo anat, daoust pe miz Eost pe miz Gwengolo eo ar miz merket gant ar *Gwyngalaf* kembraek ne vije ket kavet an hevelep ger e kerneveg e brezhoneg hag e kembraeg ma ne vije bet implijet gant an tri rummad p'edont o kenveañ war zouar Breizh-Veur... Ha dre se e c'hellomp krediñ e teuas ar ger *Gwengolo* gant ar Vrezhoneg pa zouarjont er vromañ.

Kalz a c'herioù all a c'helle bezañ ganto c'hoazh barzhoniusoc'h an eil eget egile. Ma oa ganto ar ger *Medi* evel ma kav d'an Aotrou Falc'hun, edo tonket da vont da get, n'helle ket chom en implij en ur vro 'lec'h ma veze graet ar *medi* ur miz pe 6 sizhun kentoc'h. Er stumm-se e c'helle ar ger *Gwengolo* bezañ un eñvoradenn eus donedigezh hon hendadoù e Breizh-vihan, *Gwengolo* o trec'hiñ war ar ger *Medi*.

Met penaos en deus gallet ar ger *Gwengolo* harpañ ouzh an darvoudoù ha chom bev e yezh Breizhiz ? Penaos ha perak ?

Evel m'hon eus notet uheloc'h e teu *Gwengolo* eus ar c'heltieg *Vindocalamos* = kologwenn, plouzwenn. Evel ur spontailh ez eo sellet an droidigezh-se gant keltiegourien 'zo. Evidomp-ni e verk sklaer ar ger-se ar mare araok an eost, pa vez an ed o peurzareviñ, pa vez disac'het an ed er parkeier ha pa grog da gem-

mañ liv e lavar an holl war ar maez : « Krog eo an ed da wennañ ».

Arabat krediñ ez eo al lavar-se ul lavar keltiek-rik, semitek ez eo kerkoulz all ! Setu amañ tennet eus an Aviel un nebeut komzoù lavaret gant ar C'hrist d'e ziskibien — emañ ar maeziou o wennaat a-benn an east — Evel ar Semited pa wele ar Gelted e Breizh-Veur an ed o wennaat er parkeier e lavarent moarvat alies : « Gwenn eo an ed, prestik e vo poent eostiñ ! » pe « Gwenn eo ar c'holo » hag e c'hellent ober miz Gwengolo eus navet miz ar bloaz.

Amañ e rankan ansav n'em eus testeni ebet o harpañ va zezenn. Met ma n'emañ ket liv ar gouiziegezh ganti emañ da vihanañ liv ar wirionez hag ar skiantvat.

Met ar pezh a oa gwir evit Breizh-Veur lec'h ma vez diwezhat an east, ne oa ket mui evit Breizh-Vihan, rak 'benn miz Gwengolo ne oa mui an edoù o wennaat nag o wagenniñ er parkeier.

Penaos e viras ar Vrezhoned an anv-se evelkent ? Dre voazamant moarvat, dre ne gavent ger mat all ebet da lakaat en e lec'h. Ha marteze e kavas da annezerien nevez ledenez kornokañ Gallia e c'helle ar ger kozh ober e garg c'hoazh. Rak d'an navet miz eus ar bloaz e oa gwenn bepred ar soulegi, e meur a lec'h e korn al leurioù e save bernioù kolo fresk gwenn war zislivañ ha war an toennoù etre ar mederezh hag ar c'huñtuilherezeh-frouezh — d'ar mare-se ne oa anv ebet eus tennadeg avaloù-douar hag e chome amzer vak gant an dud — e krape ar blouzerien da stañkañ gant bouchadoù kolo gwenn an toulloù graet ganti an avelaj bras.

Kement-se avat n'eo na yezhoniezh na gouiziegezh nemet ec'h adlavar an stumm-se komzoù daou zen gouizieh ha daou yezhoniezh akuitoc'h egedon : Dom Pelletier ha Viktor Henri hag en askont da se ec'h esperan e pardonot va faltazi...

M. K.

Notenn.— Er Revue Celtique XIV, p. 221-225, hervez, ez eus ur studiadenn war anv « miz Gwengolo » — N'emañ ket em e'herz siwazh ! ha ranket em eus ober hepti !

## AR VOSENN

An destenn-mañ eus « ar Vosenn » heñvel evit pozioù 'zo ouzh « Bosenn Elliant » moulet gant Kervarker e « Barzaz Breiz » a zo bet dastumet e parrez Plouizi e-kichen Gwengamp — Seblantout a ra din n'eo ket bet moulet dindan ar stumm-se betek-hen, o vezañ m'eo brav-tre e kav din ez eo talvoudus he moulañ. Kavout a reer adstummoù eus ar werz-mañ, e Luzel e kaver hini Kerdanet-Testenn Penguern a glot gant re Luzel ha Kervarker. Displeget eo bet ar werz gant Marie-Rose Briand ganet e 1879 e parrez Peder-neg, koueriadez; he c'hlevet he doa digant he mamm a gane anezhi, houmañ he doa he desket gant he dad a oa eñ eus Plouizi.

Moulañ a ran ar pennad er yezh m'eo bet displeget din.

R. H.

*Kentañ 'oa en parrouz Merrien ar vosenn antreet  
Bosenn al laou e oa hañvet,*

*Ken a oa dei ober he nezh  
En ti Kongar hag en ti Klec'h.*

*Reo Klec'h n'eus o seizh mab ganti skoet,  
Hag o seizh int bet marvet*

*Reo Klec'h d'ar bourg n'ur c'harrad,  
N'eus kaset o seizh mab, o mamm deus o charreat*

*Hag o zad warlec'h o c'hwitellat  
Kollet gante o skiant vat.*

*Er bourg pa oant arruet  
Da gât ar Werc'hez e oant aet,*

*'Trou Doue, Gwerc'hez Vari,  
Resevet ma seizh mab en ho ti.*

*Dre ur mirakl hag a oa bras,  
Ar Werc'hez dioute a gomzas,*

*Leun eo ma bered vras betek ar murio  
Ha ma iliz vras betek an treujo,*

*Ret e vo bremañ binnigañ 'r parko  
Da lakat ar c'horfo maro.*

*Kentañ park 'oa binniget,  
Liorzh an davern 'oa añvet*

*En parrouz Merrien a zo glac'har  
Sort n'eus neblec'h all war an douar,*

*O klevet al loened mut  
O vuzellat warlec'h o zud.*

*En parrouz Merrien en plas 'r marc'had  
'Mañ an aour melen da rozellat.*

Dastumet e Plouizi e 1947.

## NOTENNOU HA KELEIER

**KAIEROU KRISTEN.**— (Rener : Lociz ar Floc'h, 2, rue du Parc, Saint-Brieuc, C. C. 34.312 Rennes).

Setu en niverenn 3 un dastumad studiadenoù pouezus. Dindan bluenn Kloareg ar Veuzit e kaver amañ ar pennad klokañ a vefe bet embannet betek-hen diwar-benn buhez hag oberoù Pascal Kerenveier. Lenn a reer en niverenn-mañ ivez ur pennad diwar-benn ar barzh brogarour flandrezat Gezelle hag unan all diwar-benn al livour Verkade eus skol livourien Pont-Aven.

**AR FALZ.**— Niverenn 7 ar Falz eo pezh-e'hoari Anton Tehec'hov. « Ar goulenñ-dimeziñ » renket e brezhoneg gant Keravel. Berzh a ra ar pezh-e'hoari-se war ar maez, pa 'z eo bet e'hoariet ouzhpenn 20 gwech, war a lavar dimp an aozer. Ur yezh brav ha flour, a zo ur blijadur hel lenn. Ur gerscenn vras, avat, kavout e oa bet re gemmet ar pezh-e'hoari gant an aozer. Intentet eo an aozadur-se, anat, evit tud ar maeziou. Al lenneien o defe karet gwell, moarvat, kaout un droidigezh, hepmuiken.

Al levrig a e'hell bezañ prenet e ti **Ar Falz** : A. Keravel, instituteur à Dirinon, Finistère. Hep priz merket.

**CELTA.**— Niverenn 4 Celta a zo deut er-maez ennañ ur pennad eus « Envorenoù ur prizoniad » e brezhoneg gant Alan an Diuzet, ur pennad mat gant Paol Kentel diwar-benn orin anv Breizh. (A. Le Diuzet, 33, rue Paul-Bert, Saint-Brieuc).

**THE IRISH DIGEST.**— (Monthly Magazine published at 109 Malborough Street, Dublin.) Un diverra e saozneg eus meur a bennad plijus diwar gelaouenoù ha levrioù. Ur bajennig a zo en Iwerzhoneg. Souezhet omp, avat, ne vefe ket brasoc'h lodenn yezh ar Vro.

**ME A ZALC'HO.**— Kelaouennig Kevredigezh ar C'helc'hioù Keltiek a gendalc'h da zont er-maez resis : Mme Galbrun, 78, rue de Fontenay, Vincennes (Seine).

**YEZHADUR KONGAR,** dindan ar wask, a vo lakaet e gwerzh hepdale. Fur eo prenañ ur skouterenn diwar vremañ. Skridoù Breizh, B. P. 45, La Baule, Loire-Inférieure.

An emsav kevredadel e Bro-C'hall.

Degemeret hon eus **Action Directe**, stagadenn ar gelaouenn **Fédération** (9, rue Auber, Paris, 9<sup>e</sup>). En niverenn 26 ur pennad anvet **War-du ur vroadelouriezh vreizhat ?** Ar gelaouenn-se a zo krog d'ober embann e brezhoneg evit he menozioù politikel.

**KENDALC'H HOLLGELTIEK St-BRIEG.**— Etre an 20 hag ar 27 a viz Gouere e vezo dalc'het e St Brieg ar C'hendalc'h Hollgeltiek aozet gant **CELTA** dindan renerzh A. Le Diuzet. Gortoz a reer kaout kannaded eus Bro-Gembre hag eus Bro-Skos. Kevredigezh ar C'helc'hioù Keltiek, B. A. S., ha strolladoù all a gemero perzh er c'hendalc'h. D'ar sul 27 e vezo ur gouel bras gant kantadoù sonerien ha dañserien. Evit kemer perzh ha kaout diskleriaurioù hiroc'h, skrivañ d'ar sekretour : 10, Bali Sévigné, St Brieg.

Dre zichenñs, avat, e tegouezh ur C'hendalc'h Hollgeltiek all e Dulenn dres d'ar memes mare, ken na vo ket marteze kalz gweladennerien eus Bro-Iwerzhon.

**KAMP B. A. S.**— Skol-hañv ar sonerien ha dañserien a vo dalc'het er bloaz-mañ e-kichen Gwened e Sarzhav dres goude kendalc'h St Brieg, da lavarout eo eus an 29 a viz Gouere betek ar 16 a viz Eost. Skrivañ hepdale da sekretour B. A. S., P. Monjarret, 42, straed Notre-Dame, Gwengamp, pe da rener ar c'hamp, P. Le Fourn, 275, straed Anatole France, Saint-Pierre-Quilbignon.

**SKOLIQU KEMBRAEK.**— Diwar skouer skol gembraek Lluest, krouet ez-prevez gant Urdd Gobaith Cymru e 1939



(diazezet e voe da gentañ e canoflan an Urdd, en Aberistwizh) ha renet gant an Dimezell Norah Isaac, emañ Poellgor Deska-durezh kontelezh Kêrverzin o paouez sevel, ez-ofisiel, ur skol hollgembraek e Llanelli. Digoret eo bet ar skol-se da zeiz Gouel Dewi ha fiziet en Dimezell Olwen Williams, bet abaoe ugent vloaz o kenlabourat gant an Urdd. Skolioù all, kembraek penn-da-benn, a vezo digoret e Kêrverzin (hepdale) ha diwezhatoc'h e Maesteg, Llandudno, Bae Colwyn ha Wrexham. An holl skolioù-se a vezo meret ha skoazellet gant ar c'huzelioù kontelezh. Ar saozneg a vezo kenteliet enno evel eil yezh.

**AR YUZEVIEN : UR SKOUER EVIDOMP.**— E Bro-Balestina ez eus 600.000 Yuzev o c'houzout hebreeg. Evito ez eus bet embannet, er bloaz tremenet, 947 levr, a zo bet gverzhzet 500.000 luriad-saoz diouto. Ne gredomp ket goulenñ pet levrenn a zo bet embannet er bloaz tremenet evit hor milionad brezhonegerien.

**D'AN DASTUMERIEN.**— Da werzhañ, un nebeut niverennoù kozh, rouez-kenañ, eus Gwalarn ha Sterenn.

Gwalarn : 10, 11, 14, 15, 17, 19 betek 30, 32, 33, 36, 37, 38, 41, 43, 44-45, 46, 48, 49, 50, 52, 53, 55, 60, 65, 67, 79, 91, 100, 104-5, 106-7, 108, 112-13, 133, 134, 135, 136-7, 138-9, 140-3, 146-7, 154-5, 158, 159, 160, 161, 162, 163, 164, 165.

Sterenn : 2, 3, 4, 5, 6, 7, 8, 9, 10-1, 12.

Pep niverenn : 80 lur.

Pep divniverenn : 140 lur.

Un dastumadenn glok eus Sterenn (n'eus nemet unan) 1.500 lur.

Dre bakad erbedet, hep mizoù kas.

Mar deo diglok ho tastumadenn, skrivit deomp hepdale. Chom a ra ivez an niverennoù-mañ eus TIR Na N-og : 6, 7 (R. kozh) 1, 2, 3 (R. nevez).

**EVIT AR BREZHONEG.**— Goulennoù evit kaout ar brezhoneg er skol a zo bet kaset d'an Ao. Naegelen gant ar JUB (Yaouankiz ar Skolioù-Meur) d'an 19 a viz Ebrel, gant TIR NA N-OG d'ar 1 a viz Mae, gant OBER, D'an 8 a viz Mae ez eus bet graet ur votadenn a-du gant ar brezhoneg e Kuzul-Mour Penn-ar-Bed.

Da c'houlenñ Kevredigezh ar C'hele'hioù ha BAS en deus ar Ministr respontet dre « nann ! » Pezh n'en deus ket miret outañ, a-hend-all, aotren e vije graet, evit ar vachelouriezh, war dachennad Skol-Veur Roazhon, poelladennoù war ar portugaleg hag ar ruseg. (Journal Officiel, 29 a viz Ebrel 1947).

Un dlead strizh eo d'an holl strolladoù breizhat, ha da holl vignoned ar brezhoneg, kas goulennoù hep skuzhañ. (Ministre de l'Education Nationale, 110, rue de Grenelle, Paris, 7<sup>e</sup>). Be-wech ma vezo kaset ur goulenñ, ra vezo roet kemenn deomp, ha d'an holl gelaouennoù breizhek.

Stourmonp dizehan evit kaout ar Brezhoneg er skol !

**SONEREZH.**— Ti Gaudu en deus embannet nevez 'zo dek kanaouenn eus ar Vro, eil-toniet gant J.-R. Quignard. (Editions du Ménéstrel Breton, 16, Rue de Rohan, Saint-Brieuc).

**GANEDIGEZH.**— An Ao. Bernier kelenner En Orient a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh ur vere'hig anvet Mari-Annaig, en e diegezh.

Brav ar bed gant ar vamm hag ar baotrez.

**VENT D'OUEST.**— Goude un ehan ez eo adkroget VENT D'OUEST, dindan an talbenn Kanevedenn ec'h embann bepred pennadoù e brezhoneg. Koumanant : 150 lur, 6 miz. Vent d'Ouest, 10, rue des Pyramides, Paris, 1<sup>er</sup> (C. C. P. Goaziou, 977-31 Rennes).

**KELOU EUS GWENED.**— Dindan an talbenn Skol ez eo dent er-maez un dastumadennig e gwenedeg oc'h embann « sorbiennu kampenet e brehoneg get T. Pabu ». Bez e kaver e-barz « Merh er Roué » hag « En aval ru » dastumet gwechall gant Buleon, « Guennou en Erh » hag « Er Seih mén gavr » gant Grimm.

**AL LIAMM** a ro d'imp un niverenn fonnus-kaer ar wech-mañ (Nnn 3), meur a bennad plijus emañ. Ar pezh en deus bourret ac'hanon ar muiañ eo an droidigezh diwar ar c'hembraeg gant F. E. eus danevell Dik Trevan ar Jakez Riou kembraet. Ar pennadoù e kembraeg a zo mat ha pouezus evit kelennadurezh hor mignoned e Kembre (P. Le Bihan, 6, rue du

Maréchal-Joffre, Versailles, S.-et-O., C. C. 5349.06 Paris).

**EVIT BREIZHIZ TOULBAC'HET.**— Ar pennad amañ da heul a zo bet kaset dimp gant Plaid Genedlaethol Cymru :

« Emañ e 'hwezek Kembre anavezet-mat o paouez kas d'ar Gouarnamant Gall ul lizher evit goulenn ma vefe digastizet an holl vrogarourien vreizhat.

Lavarout a reer el lizher « ez eus bet kondaonet d'ar galeoù, d'an toull-bac'h ha d'an dizenor broadel, abaoe dieubidigezh Bro-C'hall, etre 400 ha 500 Breizhad a oa ezel an emsavioù rannvroel ha broadel ».

Lavarout a ra ivez sinerien al lizher e kav dezho « ez eo bet barnet an dud-se en abeg d'o labourioù sevenadurel pe politikel a-du gant Breizh, kentoc'h eget en abeg da draoù all ».

E-touez ar c'hwezek Kembre o deus sinet e kaver : an Ao. Rhys J. Davies, kannad e ti ar c'humunù evit Strollad al Labour, an Ao. Mac Grath, arc'heskob katolik Kêdriz, Gwynfor Evans, rener Strollad Kembre, Gwyn Daniel, sekretour Unvaniezh Vroadel Kelennerien Gembre, D. Jenkins, sekretour Kuzul Arboellerezh Kembre, hag ivez kelennerien, skrivagnerien ha tud-a-lezenn anavezet-mat ».

Bennozh-Doue da Gembreiz kelt o c'halon.